Ya, gant an son 'dije ket hec'h amourusted.
4. " Koantennig koant, koantennig, din ieret,  
Pegement e kousto din ka't hoc'h amourusted.
5. - Kant lur, emei, en arc'hant gwenn asuret  
A gousto deoc'h ka't ma amourusted.
6. E-lec'h kant lur, koantennig, a c'houlennet  
E-lec'h kant lur, koantennig, a c'houlennet
7. C'hwi pe'o daou, tri, ya, pevar mar keret,  
Koantennig koant, c'hwi pe ar pezh a gerfet."
8. Ha p'int arru en aod ez int dizambarket  
Da c'hoari e well-baotr, an aotrou 'zo 'n em laket.
9. Aotrou, emei, ur momed pasianted  
Me 'wel aze eur c'hastell lec'h ma vezimp lojet,
10. Hag eur gwela-pluñv, liñselioù dourampezet  
A zo warnañ eur gontepoentenn fleuriet,
11. Hag a-us dimp rideozioù dantelezet  
Hag eun aval-orañjez e pep a benn anezhañ,

12. Hag eun eostig bihan koant 'vez er c'hreiz o kanañ :  
" Koantennig koant, me 'garje bezañ ennañ...
13. Ha pa vin arru er gêr din-me e vo krozet  
'Blamour d'an arc'hant am eus-me deoc'h roet.
14. - C'hwi 'lavaro dei e oac'h bet en dour kuezhet  
O tremen ar rinier, darbet deoc'h bezañ heuzet.



Kanet gant Soaz an Digerc'her, Ploubêr,  
2/6/52 : kanañ a rae war ur ventadurezh laosk awalc'h  
oc'h astenn hag o kenmañ ar sonerezh diouzh ezhomm ar  
gerioù.

Avit an tor, kehveriañ gant Duhamel, Musiques  
bretonnes, niv. 297: heñvel eo ar mentadur, met war  
vuzelioù Soaz an Digerc'her eo bet treuzlec'hiet ar  
mod er skeul-gan re ken karet gant Tregeriz.

Avit ar c'homzoù, sellout ouzh Sonioù an Uhel,  
Levrenn 1, pajenn 198.



Ar plac'h degaset d'an arme ©



Skedusoc'h evit an heol, sklaeroc'h evit an deiz  
Kalon ur c'habiten yaouank a zeu d'am gwelet bemdeiz.

" Deut-hu ganin, ma mestrez, ma mestrez deut ganin,  
Me ho kaso d'an arme, hoc'h eureujo goude-se.

Me 'breno deoc'h un abid a vo pesimantet,  
Un tok kastol war ho penn, c'hwi neñvel ouzh ur gadred.

- Salokras, kabiten yaouank, d'an arme nan in'ket :  
Ma mamm 'zo war he gwele klañv, presin he maro 've graet.

Ma mamm 'zo war he gwele klañv, ar maro 'n he c'halon... "  
Ar plac'h yaouank 'ya d'an arme 'goll he reputasion.

" - Montez, montez la belle, voila mon cheval gris,  
'Penn ma vo hanternoz sonet ni vo paset Pariz. "

E-barzh ar barrouz C'hlaz, pa int bet arruet,  
En osteliri antreet, war an oaled azezet,  
An ostiz, an ostizez, 'vel -henn dei o deus laret :

" Deboi, jour deoc'h-hu, plac'h yaouank, plac'hig diwar ar maez,  
Mar'd omp-ni d'ho fantazi, chomet ganimp da vatezh.

Salokras, emei, ostizez, diwar ar maez n'on ket,  
Me 'zo ganet a zenjentil, me 'zo bugel a di mat,  
A zo deut er bloaz-mañ d'an arme, ya, dre ma bolontez vat.

- Ma vijeoc'h ganet a zenjentil bugel 'vel ma leret,  
C'hwi vije duze 'barzh ar sal oc'h evañ gwin klered.

C'hwi vije duze 'barzh ar sal gant ho tud o koaniañ,  
Hag arc'hant en ho kodelloù ha c'hwi kontant da baeañ. "

War ar propozioù-se, ar c'habiten yaouank antreas :  
" Koaniet, koaniet, katarini, kemeret ho piijadur,  
Hag ouzh kostez ur c'habiten, c'hwi a gousko a dra sur.

Sonet, sonet, trompeteu, ho piolañsoù doussamant,  
P'emañ ganimp o koaniañ fleurenn ar merc'hed koant.

Da ket hanter ar banked ar verc'h yaouank a zo marvet :  
" Siset, siset, trompeteu, ho piolañsoù dousamant,  
Pa eo maro ma mestrezig ma c'halon 'zo dolant.

Pelec'h vo interet Katarinig ma mestrez...  
Nan eo barzh e jardin he zad dindan ur bod-lore  
Me a bedo 'viti Doue, koulz en noz hag en deiz.

Nan eo barzh e jardin he zad dindan ur boked-roz  
Me a bedo 'viti Doue, 'vit mar gay d'er paradoz "...

" Digorit din ho tor, ma zad madañ karet,  
Tri deiz, ma maro am eus graet, ma enor 'm eus saveteet.

- Laret din, Katarinig, piw en deus hoc'h aleuvet  
Nan eo ur c'habiten yaouank he mab un den racoutet  
A oa o sevel an trajoù diwar ar baisanted ...



00000

Kanet gant Soaz an Digerc'her, Ploubêr, 2/6/52. Karañ a rae  
gant ur ventadurezh laosk awalc'h, o verrast pe oc'h astenn ar  
frezennoù senerezh hervez ezhome ar c'homzoù. He oa ket eus  
kennebeut all da zispartiañ ar pozioù an eil dicuzh egile, an  
hanterenn gentañ eus ar ven o vezañ kanet dre ziv wech.





Ar c'homzoù a zo sur mat diglok, ha leun a c'herioù gallek  
digomprenet gant ar ganerez evit al lodenn vrasañ anezho.

Kevveriañ gant sonioù poblek Bro hened dastumet gant L.  
Herrieu, p. 24 : barn e Chateaubriand, hag ivez gant ar son  
gallek : La belle se promène, e Tralalaleno, p. 56.

Ur plac'h kozh eil o choñ e kichen Soaz an Digerc'her, a ouie  
ivez un dra bennak eus ar son, hag a gane evel-henn :



# AP Pezramm



Kanet gant Maria Rouz, pried August ar  
Mason, Kergrist, Ploubri, 22 / 7 / 52.  
O vezant ne on ket dereat ar c'honzant, ne  
felle ket d'ar ganerez o displegant.



Ken trist eo ma flanedenn, aet on skuizh o ouelañ;  
E-kreiz va brasañ anken n'em lakan da ganañ  
Da welet a ma gavo remed d'am foan speret  
O kentañ deñc'n va c'hlemmou, tud yaouank selaouet:

Me zo paourkaezh miliner, hi zo merc'h tiegezh;  
Goude bezañ he c'haret me zo karet ivez;  
Ne oan nemet ur bugel hag hi bihanig tre  
Pa n'oa graet anaoudegezh an eil gant egile.

E vel na oa etrezomp nemet ur park hepken,  
Vijomp bepred assemblez o c'hoari, o pourmen,  
O c'hoari, oc'h ebatal, hep kont hag hep muzul,  
Er c'hatekiz a-wechoù, en oferenn d'ar sul.

An dud demeuz hor gwelet a lare etrezo:  
Renkomp bezañ breur ha c'hoar pa n'em c'heullimp ato  
Nikun nije bet sonjet a oa an ebatoù  
Oc'h ober ar skoulm kentañ etre hor c'halonoù.

O bugaleaj evurus ha pell zo tremenet!  
A boan graet hor pask kentañ ni voa dispartiet;  
Hi voa kaset da Vrig, lakaet e pension,  
Me ieas gant va cherent deñ tu all d'ar c'hanton.

Va zad o vezañ merour, feurmas ur veilh nevez;  
Ret oa din-me labourat ha chench krenn va buhez;  
Deskiñ lemañ ar vilin, ober paotr miliner,  
Digor an dour er c'skluzioù ha pep tra en hor ger.

Dont a reas ar mare da vont paez eus ar vro  
Biskoaz deus ma c'hoar vihan n'am boa klevet keloù,  
Deus he c'herent kennebeut glevan mui kaozeal,  
Hep ma c'hellan koulskoude donet d'he disonjal.

Echu va zri bloaz servij, d'ar raok-eost diwezhañ  
 Tigouezen e ti va zad laoen en ur ganañ,  
 Henvel eus ur goulvennig hi libr he divaskell,  
 O vonet maez ur gaoued, a gan, a nij a bell.

O vonet pretik goude da wellet va mignoned,  
 Tistroan diwar va hent hep digarez ebet  
 Evel pa vijen poulzet da dremen dre ar ger  
 E pehini boa bevet va evurusañ amzer.

An dud a oa o tormañ, peuzastum an etu;  
 yudal re ar mekanik, prez a oa a bep tu;  
 War ma c'halon ig ivez a oa prez warnezi  
 Kement evel ma lamme o tostaat eus an ti:

D<sup>h</sup>mat deoc'h hu Franseza, ha mat a ya bepred?  
 Mar ya kenkoulz diganeoc'h, den yaouank didostaet;  
 Marteze oc'h eus sec'het, azezet un tammik  
 Da c'hortoz ken teui va mamm zo aet da gerc'hat jistr.

Gant plijadur aeezin evit din n'on ket skuizh  
 Tri deiz zo emeon distro eus a Sanr Deniz,  
 Ha benn eizh devezh amañ a vo pervarzek vloa  
 Oan azezet n'ho kichen 'vit ar wech diwezhañ.

Nec'het bras on emezi koulskoude gret ket din  
 N'em fazian d'ho kemer vit Laouig ar Vilin;  
 Touzet peus oho plev melen, chenchet henveligez,  
 Met ho mouezh hag ho savar zo bepred ar memes.

Kement n'eus graet an amzer n'eo ket vidon hepken,  
 Pep tra a n'eus e dammig ha c'hwi peus ho lodenn;  
 Ar plant yaouank c'hell brenañ dougen frouez ha bleunioù  
 Ha bremaig teui da sevel keoni deus ho zrojoù.

Prestik neuze tigouezas he mamm e-barzh an ti;  
 Chom a ran c'hoazh un tammig da gaozeal ganti;  
 Kalz hiroc'h vijen chomet ma vijen bet dibrez  
 Ken berr kavan amzer en ho c'honpagnunez.

Da zevezh Gouel an Hollsent n'em gavomp adarre  
 Asamblez barzh en Brieg oc'h evañ ur banñ  
 Ha ken vit n'en separiñ ni devoa lavaret  
 An eil d'egile ac'hanomp e vijomp daou bried.

O pegen koant he c'havan neuze o vousec'hoarzhin;  
 Ruziañ a rae he divjod gant ur sellik ouzhin,  
 Ha ma vije a-wechoù nec'het en he c'homzoù,  
 He daoulagad lavare ar pezh re ket he genou.

Ret vije deoc'h he gwelet azezet em c'hichen,  
 Hi gwisket ken dereat, ul las du n'he c'hrec'hen,  
 Gant un aerig ken chichant, ur vouezhig ken tener  
 Geiz al laboused munut a zo rust n'he t'henver.

Karout a rafen bezañ ar maen war behini  
 Ve laket he zroadig skañv evit tremen er pri,  
 Pe ur bokedig melen e kornig e jardin  
 Marteze vo dastummet da lakaat n'he feultrin.

N'hellañ mui diwar neuze he c'has deus ma spered;  
 He sellig dous ha tener berr warnon bepred;  
 Bepred a seblante din he c'hlevet huanat  
 Ha gwel ar skeud anezhi dirak ma daoulagad.

He c'haret, he servijañ, bevañ en he c'hichen,  
 Ve vidon ur blijadur, n'on ket vit rein da gompren,  
 Karet ha bezañ karet hervez va zantimant  
 Zo evurusted ne mañ ket e flas 'barzh ar bed-mañ.

Er foarioù er pardonioù a ne'emp c'heuillempe goude,  
 Plijadur en em gavet an eil gant egile;  
 Birviken nijemp sonjet vije deut un amzer  
 Vije fin a'hon evrustea ha a'hor prepozioù kaer?

C'hoazh drugarompkad Doue, n'eo ket a gwall deodoù  
 C'helle lakaat yenijenn etre hor c'halonoù,  
 Met an arc'hant miliget, un daou pe dri c'hant skoued  
 Vir ouzomp dont asamblez, ren ket da n'em garet.

Pa oan bet eus he goulenn bremañ a zo ur miz  
 Digant he zad hag he mamm evel m'emañ ar c'hiz?  
 A voe roet din da c'houzout voan ket h'o santimant  
 Ha Fraseza emezo oa ket n'hini n'ho c'hoant.

Me garje bije biskoazh klevet ar c'homzoù se  
 Perè a gouezas warnon evel tolioù kleze;  
 Va izili a grene, va c'halon baour em c'hreiz  
 A gredan vije rannet siwazh gant an ankrez.

Ne zeus den evit kompren va foan va rann-galon,  
 Nemet n'en gaot rafe n'en hevelep feson;  
 Goude kement e c'haret, beza^karet ganti,  
 O pebezñ displijadur, o tristañ disparti!

Ar glac'har, ar velkoni, keuz an eil d'egile  
 A zeuio dre c'hvas Doue d'hon disken prest er bez  
 Henvel eus a zaou voked distag eus ha zrojoù  
 A zeu fonnus da oenviñ ha da goll ho bleunioù.

Klevet am eus abaoe zo c'hoant dezho dimeziñ  
 Da vab un den pinvidk ker oc'h ker diouti:  
 Nann birviken emezi dimeziñ na rin ket  
 Nemet am be n'hini m'eus c'haant evit pried.



Arsa ma merc'h emezi, na din me lavaret  
Ha c'hwi zo kontant paourig da gaout ur bried  
Berroc'h kavfet an amzer bremañ e-pad an hâv  
Ha tommañ meoc'h ho kwele, goude pa zeui ar gouañv.

O ya va mamm emezi , certain me zo kontant  
Demeus a greiz ma c'halon, da gaout ur paotr yaouank  
Mar d'eo kaner ha danser, hag ur paotr delikat  
Neuze am eus esperañs d'ober tiegezh vat.

Neuze ar paotr yaouank mañ a zo joaius ha gae  
Hag a zistroas d'ar ger, hed an hent n'ur ganañ  
Penaos eta Yann Gogig te zo bet o vale  
Un tamm out diwezhat, oc'h anañs deomp an deiz.

Neuze distroas ouzhin gant un air da c'hoarzhin  
Mar d'eo gwir on me kogig, out sur ul louar fin  
C'hwi pefe ar vadelezh da vont bremañ raktal  
Da anans ma dimeziñ, betek ar presbital.

Ar c'hoarzh war ma muzlloù, pa n'on ket vit miret  
Ya va mignon emezañ, me rei se na re ket  
Monet a ran evidoc'h, betek ar presbital  
Rak merc'h an intanvez evidoc'h n'eo ket fall

Demat deoc'h aotrou person, me a zo deuz gant pres  
Da c'hout ha c'hwi zimesfe, ur c'hog hag ur bollez  
Pere o deus desir bras, da vezañ uniset  
Un tammig a zo gija o deus en em choazet

Neuze a respontas din ivez n'ur vousec'haorzhin  
Deus amañ e-barzh ar sal kemer ur bane gwin  
Troet ez out bepred un tammig d'ar gevier  
A peus jamez klevet, ve dimezet ar yer.

Eskuzit aotrou person, ma m'eus drouk parlantet  
maleur eo d'an dud yaouank pere zo lezañvet  
Ar re a barlantañ deoc'h a zo daou zen yaouank  
Azezir bezañ uniset vel diou galon gontant.

Ar re ~~e~~ barlanto deoc'h, zo mal ha feumelen  
A zezir bezañ staget, gant ar memes chadenn  
Unan ane trivec'h via an hini all pemzek  
Zo pell zo bras en hirvoud, c'hortoz bezañ dimezet

Mat aet d'ar ger ma mignon, lar de dont d'an iliz  
Ha me o interrojo war benn ar c'hatekiz  
Pa zo bet goulennet digante, ha na ouient netra  
Demeus ar sakramanchoù, ar re brinsipallañ

Kit d'ar ger bugale, evit ur bloaz pe zaou  
Da c'hortoz ma po desket, xdern ~~ar~~ sakramanchoù  
Neuze savas e zivskoaz, me a gred e sonje  
un druezeo emezañ dimeziñ bugale.

Neuze e teuont d'ar ger o daou en ur ouelañ  
Ret e vo domp emeze, donet da studiañ  
Ret e vo domp studian, koulz an deiz hag en noz  
Mar ouefomp ket re nevez, ni zisko re gosh.

Tri pe bevar miz goude, e ya an intanvez  
da gaout an aotrou person, da larat dezhañ taol evezh  
Rak va merc'h zo langisant, un tammig zo dijà  
Seul vui avañs he c'hlenved, ya bepred war wella.

Setu an aotrou person, dezhi n'eus lavaret  
Lavarit dezho dont c'hoazh, hg a vont dimezet  
C'hwi avat daou zen yaouank a lavar ar person  
A oar n'em gonvertissañ, hep mont d'ar mision

Ar memez tra ez int bet, dimet hag eureujet  
Gras da vezañ evurus, keit a vefont war ar bed  
Bonheur a zeziromp de keit a vont er bed mañ  
A goude pa vont maro, er gloar da jouisañ.

Korentin BOUARD

Boket ar yaouankiz

Ur sulvezh deus ar mintin oan o lenn va levrioù  
 Me glev al laboused o kanañ er bodoù  
 A dre brenestroù va c'hamb, remerken ar c'hlizen  
 Ha heol brillant ar mintin o dol e sklerijenn

Tridh a ra va c'halon o klevet al laboused  
 Dre o c'han meuleodus, hag o mouezh alaouret  
 Pere a lavar din me, fasil mat dre o mouezh  
 Poent eo dit den yaouank, dont da choas ur vestrez

M'eus ket graet reflexion vit klevet kement se  
 Memestra on n'en laket da ober ur vale  
 Evit kemer an air fresk, deus douster ar mintin  
 A meus kaket em speret da vonet d'ar jardin .

Da gomtempliñ va fleurioù, e mesk al louzoù fin  
 Dre o delioù arozet gant glizen ar mintin  
 Ha dre m'o c'haven ker gai, am eus bet dastimet  
 Unan demeus abep sort, da formi ur boket.

Pehini am eus plaset, oa e prenestr va zi  
 Refreskiñ ra va c'halon, demeus e gomtempliñ  
 Pa oan deus e admirañ, am eus bet remerket  
 Va fidelañ kamarad o tont d'eus va gwelet

Evit donet d'am pediñ da vont samblez gantañ  
 Da bardonañ d'ur chapel a zo er barouz mañ  
 A goue fin an ofis am eus bet remerket  
 Eno war ar blasenn e kichen ar vered

Ar gaerañ demeus ar fleur, a zo bet war ar bed  
 Me garfe e fosedañ da lakat em boket  
 Kaeroc'h eo evit ar roz, hag an holl fleurennoù  
 Deus a gement a v'heller, gwelet er jardinoù

Na n'eus na baum nag esañs, kapabl da dol ur c'houez  
 Evel ar fleurenn gaer se ma ne dae almes  
 Met desfiañs bras am eus pa welan he zelioù

Gant an aon marteze, ve poezon e grizioù

Pep delien anezhi a zo evel pentel

Gant ar c'haerañ penturioù, a gaver war ar bed  
An aour hag ar perlez, ar c'haerañ ruz ha gwenn  
Memes ar maen prisius zo netra e kichen

Honnes a zo kaeroc'h, evit n' e deo al loar  
Brillantoc'h evit an heol, dre e domnder pa bar  
Ma buhez en antier ha va holl baperioù  
Zo netra evit design, rouanez ar fleurioù

Desir am eus d'anos deoc'h, petra eo ar fleurenn  
Ur plac'h yaouank koant meurbed, war gornig an dachen  
Gant ur visaj laouen, hag ur selloù kontant  
Kaeroc'h eo vit an astroù demeus ar firmamant

Gant ur sellig a gorn, n'eur drein ma daoulagad  
En ur douch demeus he brec'h, me lar d'am c'hamarad  
Sel amañ Kamarad ur gaer a blac'h yaouank  
Houne s avat ma mignon a blij d'am santimant.

Ma mije ardiegezh deus ma intension  
A oan aet d'he saludiñ, kontant bras ma c'halon  
Me garfe klevet an tu da glevet an doare  
Pesort renk a salc'h ar plac'h hag a be sort ligne.

Kerkept e oan respontet gant un den venerabl  
Oa ur plac'h onest ha fur, ur familh respektabl  
He c'homzoù he demarchoù a blij d'an holl dud fur  
Ur gahon an tenerañ ur plac'h a blijadur.

Eurus ez on va den mat da laret deoc'h mersi  
Da vezañ roet din me an depaig anezhi  
Gant fiziañs en o komzoù, am eus kalz a joa  
Ma ya da lavar deoc'h kenavo ar c'hentañ

Ben ur pennad goude se, an daou n'ur bourmenin  
 Gant kalz a sivilite me ya da saludiñ  
 Dont a ran da c'houl enor deus ho kompagnunez  
 Mar de polontez vat da barlant asamblez

Deus em antreteniñ gant kalz a blijadur  
 Div eur hon eus tremenet komz eus hon avantur  
 Neuze pad an disparti teuemp d'en em saludiñ  
 Gant an esperañs vras d'en em zaremprediñ

Amañ prometet hoc'h eus, keit a vemp e buhez  
 Da gaout kalz a resped an eil vit egile  
 Da en em zaremprediñ bepred en onestiz  
 Ha da baseal gant joa, deizioù hor yaouankiz.

Neuze ez omp bet omp daou epad daou vla hanter  
 O roulañ hor yaouankiz, gant furnez ha douster  
 E pep lec'h ma n'emp gavemp, santemp berr an amzer  
 Pa m'eus bet fidelite ha karantez dener.

Deut mare ar pardonioù, me lar d'ar feumelen  
 D'ar pemzek deus a viz eost, deomp da bardon Kleden  
 Neuze a respontas din na vije ket manket  
 Ha certain ar wirionez he devoa din laret.

D'an devezh asignet me a ya d'ar pardon  
 Trionfant ma spread ha joais ma c'halon  
 Pa oan erru eno an bus remerket  
 A oa e kompagnunez he c'hamaradezet

Kaeroc'h vit an heol brilliant, pa loskeg sklerijenn  
 Me remerkas ma mestrez barzh e porched Kleden  
 Kaeroc'h vit ur berlezenn, hag ar fleur da viz mae  
 Me remerkas ma mestr ez kichen an nor gostez

Gant ul liv ken tener ur c'horf ken delikat  
 Ur selloù ker joaus, glas he daoulagad  
 Hi ar bravañ plac'h yaouank a gement zo et bed  
 Kontantamant va spered, joausted va c'halon

Na n'eus den evit kompren pegement he c'haran  
Gonet e deus ma c'halon pa n'em gonsiderañ  
En he gompagnunez mañ va holl gontantamant  
Hag he foltred dirazon a zo atav present

Goude ar gousperoù an daou zo n'em gavet  
Ken kontant ha daou ael, am andret prometaet  
Pa oamp en em remerket, hor boa kement a joa  
An dour en hon daoulagad kasimant vel gouelañ

E-barzh an andred se samblez gant va mestrez  
Am boa paseet eno tout ma abardaez  
Karout a ran mignoned rein deoc'h da gompren  
An daeloù hor boa skuilhet, mesk ar c'homzoù laouen.

Eno hon eus prometet , gant joa mesk an daeloù  
Ur gwir garantez parfet, da betek ar maro  
Deus ac'hane d'an iliz dirak an Doue omp aet  
D'ofriñ hor bromeseoù d'ar Werc'hez benniget

Neuze me hec'h c'honduas da betek ti he zad  
Ha glac'har en hor c'halon o tont d'em guitaat  
O tont ac'hane d'ar ger ukupet va sperd  
O sonjal n'he froposioù ne santen ket kerzet

Met tostet ra an eur ma vemp dispartiet  
Benn ur pennad goude se e resevas billed  
Lennet am eus warnezan komzoù meurbed c'hwero  
Ret a oa din partial da servijiñ drapo.

N'eo ket o vont da soudard emañ va nec'hamant  
O tileziñ va mestrez emañ va holl dourmant  
Met ken evit partial on aet betek he zi  
Dre komzoù an tenerañ eo deuet d'am c'honsiliñ

Ha dre lizheroù charmant a reseven alies  
 Am boa konsolasion eus a berz va mestrez  
 Neuze n'em laken d'o lenn pa mije liberta  
 Berroc'h kaven va amzer o tremen va c'honje

Un tamm raok ma c'honje am eus resevet  
 An ord a berz ar cheffoù da vezañ disarmet  
 Neuze gant ampresamant me skrivias ul lizher  
 Evit annons d'am mestrez e oan erru d'ar ger

Benn pemzek deiz just goude, e oan ebarzh he dor  
 Da eizh eur dimeus an noz e c'houlennen digor  
 Birvi a ra va gwad n'ur antren barzh an ti  
 Ha kerkent kozh ha yaouank int deñt d'am ambrasiñ

Ma unan pareilhamant am eus laret dezho  
 Joa am eus d'eus o kwelet ma am c'harit ato  
 Va spered betek o ti alies a zo bet  
 Abaoe ar wech diwezhañ am eus me o kuitaet

Ni zo ivez kontant bras oc'h n'en gavet er ger  
 Hag hervez an aparans n'ho peus ket bet mizer  
 Kredit mat an asurans keit oc'h bet en arme  
 N'an m'eus graet nemet kreskiñ vidoc'h ho c'harantez

Neuze am eus esperans kavout pero en tmnsor  
 Pehini o peus savet, ha maget gant enor  
 Ha c'hwi va mestrezfidel, gredan parfatamant  
 Da lare deoc'h bepred ar memes santimant

Va spered ha va memor oa ganec'h en arme  
 Deus skrejoù ma c'halon c'hwi bosed an alc'houez  
 C'hwi an hini a garan hag a garin bepred  
 Vit gant va bolontez vat ne vimp ket separet

Mar emañ ho santimant, vel emañ va hini  
 Goulennit dimeus ho tud konje da zimeziñ  
 Me m'eus anonset d'am re pa oan erru amañ  
 A gant ho polontez vat m'eus konje pa garan

13  
Vit deus a berz ma c'herent, vo ket ampechamant  
Pa anonsiñ de ar c'heloù, e vont meurbed kontant  
Kar na n'eus den er bed mañ a ve da faltazi  
C'hwi a zo d'am santimant, kelkoulz ha d'am hini

Benn un nebeut devezhioù me n'en gav adarre  
Evit klevet ar respont am bezo digante  
Ha pa vo d'o bolontez ni yelo d'an iliz  
Evit komañs echuiñ boket ar yaouankiz

Gant konsantamant an dud demeus an daou gostez  
Ha gant bolonte mat an eil hag egile  
Ez omp bet dimezet hag eureujet hon daou  
Gras deomp ni da n'om garet vel gwir briejoù

Setu echu ar boket demeus ar yaouankiz  
Laket hon eus d'en eren, ruban an onestiz  
Bremañ pa z'eo erhuet serret ha parket kloz  
Me a lak barzh em c'hichen em gwele diouzh an noz.

Gant gras Doue ha g hon poan e teufomp da vevañ  
Ha c'hwi yaouankiz fidel tchet d'hon imitañ  
Deut d'en em hentchi bepred gant ur gwir onestiz  
A c'hwi o po plijadur tremen o yaouankiz

Div rozenn d'eus ma boket zo gouenvet ha maro  
Da re se am eus skuilhet meur a verad daeloù  
Unan ane zo chomet e-barzhe Bannaleg  
Hag an hini all a zo e-barzh en Kolloreg

Ar peurest anezhañ a zo ganin bepred  
Konsevet e-barzh ma zi, gant kalz a resped  
Gout a ouzon a dra sur eo an aotroù Doue  
Mestr da rein ha da gemer hervez e volontez

Ha c'hwi merc'hed yaouank a galon me o pèd  
Na zeu ket da re fiziout, e prepozioù gwazet  
Ha ma zeufent da gomz deoc'h enep an honestiz  
Lavarit de hep damant mont buan war o c'hiz

14  
BOKED EURED

Dont a ran da c'houlen iseus diganeoc'h kompagnunez  
Evit ma kamimp ur boked,ma vem holl asamblez  
Mar plij gneoc'h donet d'om selaou en enor d'an daou zen yaouank  
A zo bet eureujet hirie deus taol ar sakramant

Bean zo eiz devezh tremenet abaoe ma oan avartiset  
Na da zont betek amañ evit asistiñ an eured  
Pa oa nav eur hanter sonet hag ar gwreg yaouank gwisket  
Evit mont betek an iliz evit bezañ eureujet

Ar paotr a enor hag ar plac'h a enor zo e kreiz an ti  
Pa deus groet e kompliment zo prest d'he c'honduiñ  
Met hoùmañ zo ur plac'h fur, ur plac'h elevet mat  
A deus astennet e fajoù evit mont betek e zad

Rein a ra dezhañ ur briata deus a greiz he c'halon  
Pa n'eus akordet dezhi e venediksion  
Distrein a ra deus he mamm pehini n'eus he maget  
A zo bet e risk e buhez,deus e kakat er bed

Rein a ra dezhi ur briata an dour n'he daoulagad  
Petra dal din me skuilh daeloù pa renkañ o kuitaat  
Kar me zo choazet gant Doue evit chench posision  
O tont da guitaat ma zud,ken eo glac'haret ma c'halon

Dont a ran da la ret adieu da di ma mamm ha ma zad  
Lec'h ma on bet maget sansourei ha g ivez elevet mat  
Lezt ganin ma liberte dont d'an ebad ha d'an dañs  
Met bremañ renkañ dilezel ma holl akustumañs

Chom a rin gant ma labour ha lezl an dansoù se  
Me bedo an dud bremañ da vont da di Doue  
Ken evit achuiñ ar sarmon deus ar fidelite  
A zo etre an div durzunell ar rest deus hor buhez



KLEMMOU AR BENNERREZ

Kaerad em ar maeziou asten a ra an deiz  
Dre gichennig ma zi tud yaouank a dremen  
O vont da bardonañ ken joaus ken laouen

Siwazh evidon me ar c'haerañ devezhioù  
Zo graet a velkonñ ha huanadennoù  
An hini a ga ran en deus ma dilezet  
Ha gantan ma c'halon d'e heul en deus kasset

Paourik oa em v'henver koulskoude he garan  
Dreist koll e vertuioù a zo d'am santimant  
E speret ma t a zo kenkoulz e onestiz  
Dibodik ada gaouet e mesk ar yaouankiz

Ar glac'har da vezañ bet digemaret fall  
N'eus graet dezhañ kemer war e goust ha dec'hell  
O sonjal marteze en ur zont d'am guitaat  
E vijen va unan deut de ankounac'haat

Ma n'eus kredet velse dont da vougañ an tan  
Pehini em c'halon n'eus c'houezhet e unan  
Eo n'em gemeret fall birviken ne c'hello  
Dizober ar pezh zo graet evit padout ato

Va dilezet en deus met piv a rai din me  
Da grediñ en deus graet gant e gwir bolontez  
Piv a rai din da grediñ ve chenket em andred  
Balamour ma virer ouzhin d'e gemeret

Neb zeufe d'en ober rai nemet va zromplan  
Vit ar re a n'em gar evelomp er bed mañ  
Vit ar re n'em gar evelomp en gwirionezh  
Ar poanioù ne reont nemet kreskiñ ar garantez

Bep mare siwazh din eo gouetek ma spered  
Stremvelañ anezhañ kastiz ha fall livet

Hirvoudiñ o ouelañ, o n'em glem ac'hanon  
Da vezañ kiriek d'e boan, d'e rann galon

Pa sonjan kement se ma c'halonnig a ran  
Ha me am eus gelse diou boan e-lec'h unan  
N'eo ket a-walc'h e goll e welet c'hoazh goude  
Ar boan hag an anken abalamour digme

Va mallozh d'am danvez am lak ken t'euzeudik  
Pa n'on ket evurus o vezañ pinvidik  
Eo gwel ganin bezañ an diwezhañ paourezh  
Ve mek al loened deus an noz o c'hourvez

Hounez da vihanañ war e c'hrabannd plouz  
Vit dezhi bezañ paour a c'hell kouskat didrouz  
Lec'h me barzh ma gwele ne ran nemet ruilhañ  
Hed an noz hep gellout zoken n'em ziskuizhañ

Na rin ket koulskoude evel hiniennou  
Ya da guzh o c'hllac'har e-barzh ar gouanchoù  
En o touezh a fell din me rc'hed yaouank Brieg  
Chom c'hoazh ur pannadig da glask va amezeg

E kornig va liorz a zo ur blantennig  
He brankoù disec'het a varv bep un tammik  
Kaer am eus e zourañ ha mont lies d'hi gwelet  
N'hellan ket dont a benn da c'houzout he c'hlenved

Yaouank evel dezhi diouti hon henvel  
Rin nemet kastizañ ken zeuiñ da vervel  
ar yeot evit bevañ n'eus ezhom dousijenn  
Va c'halon karantez neb garo da viken

Kanet labousigoù mesk an delioù nevez  
Vit ar re zo evrus n'eo ket evidon me  
Ha c'hwi holl tud yaouank vit mont d'ar pardonioù  
Deskit ma ganaouenn da gan had an hentoù.